

LABOURCH

RELAOUENN A STUDI

BARZHONEGOU



30 Du 1986

Niverenn 203

IMBOURC'H, KELAOUENN A STUDI

Seitekvet bloavezh

Niverenn 203

30 Du 1986

TAOLENN

Estreget em areg, gant Jil Ewan	p.3
Tarzh ar c'houmoul du, gant Yann-Eozen Jarl	p.5
Va c'hoar ar gozhni, gant Seur Erwan Madeg	p.36
A-zivout ar seblantoù, gant Yann Mikael,	p.41
Gwilherm ar Bugul, gant Daniel Owen,	p.45
A-dreuz lenn, gant J.C.	p.49

oooooooooooooooo

Skodenn-vloaz : 150 lur. Y. Ollivier, Roazhon. E miz Genver e vez paeet ar skodenn, ha reiñ a ra ar gwir da zegemer ar gelaouenn e-pad ar bloaz ; e miz Gwengolo e vez paeet an adskodenn, ha reiñ a ra ar gwir da zegemer ur stagadenn pe ziv d'ar gelaouenn.

Priz an niverenn-mañ evit ar re n'int ket emezelet e "Keneiled Imbourc'h" : 15 lur. E Breizh-Veur pe en Iwerzhon : £ 1.

Niverenn-wask : 50 015.

Ar pennadoù a zo da gas da : Y. Ollivier, 8 leurgêr ar Marchiz, 56 230 Kistreberzh.

An niverenn-mañ a zo un niverenn ordinal.

oooooooooooooooo

Bez' ez eo Yann-Eozen Jarl un emsaver deuet d'ar stourm brezhon e deroù an etrevezh-brezel diwezhañ. Ouzhpenn pevar-ugent vloaz en doa paz eo marvet. Ul Leonad a oa anezhañ, met d'ar c'houlz ma teuas d'an emsav, edo o vevañ e Pariz, war ar studi en "Ecole Centrale", pe en "Ecole Polytechnique" (kentoc'h, a gav din, ar skol diwezhañ-mañ). Pledañ a rae gant kentelioù brezhoneg a-hont, diouzhtu war-lerc'h ar brezel 14-18 enta, ha kavout a ra din en doa kontet Roparz Hemon e-touez e skolidi.

Ur redamaezh kantreol en doa heuliet Yann-Eozen Jarl en arme c'hall, ken en doa tizhet, a gav din, ar graz a Letanant-koronal da zerc'hent an eil brezel. Dindan renad Vichi e oa bet karget eus ar bitailherezh evit "rannvro Vreizh", goude ma oa bet loezet ar pep brasañ eus an arme c'hall-se goude arsav-brezel 1940.

Dre ma oa bet kargiad dindan renad Vichi e oa bet harzet ha toullbac'het war-lerc'h ar brezel, daoust ma n'en doa kemeret perzh ebet war-eeun er stourm politikel brezhon d'an ampoent en abeg d'e garg end-eeun ; boureviet e oa bet zoken, a-raok bezañ laosket da vont, dida-mallet.

E deroù ar brezel en doa embannet un toullad barzhonegoù awenet gant ar feiz e-barzh "Gwalarn" ; d'"Al Liamm" ivez, a gav din, en deus roet un nebeut testennoù, ma n'on ket faziet. A-hend-all, ur c'houmananter feal ez eo bet d'ar gelaouenn-mañ, ha tro am eus bet da genskri-vañ gantañ, hep bezañ bet tro da gejout gantañ, rak o vevañ edo neuze e-tal Pariz.

Spi hon eus da c'hellout, un deiz bennak, embann un danevell-vuhez eus ar brogarour-mañ, chomet feal d'e vro betek ar penn.

Y.O.

 ooooo

ESTREGET EM AREG

Da Youenn Olier

Estreget em areg,
 Pelec'h emañ Breizh ?
 Na breou ar grec'hienn,
 Na brugenn ar garreg
 Ned int mann
 Nemet c'hoant anezhi :
 N'emañ ket aze.
 Emañ o kantren dre hoc'h ambren,
 O klask hec'h amzer,
 O redek dre ho huñvre.

Hag evelkent, un deiz bennak,
 Marteze...
 He derc'hel a c'hellot
 Etre ho tivrec'h
 Adarre,
 Pa vo bet troet an dirienn
 Gant arar an areg,
 Pa vo bet hadet an here
 E gwaremm hon areg dimp :
 Ar Brezhoneg.

Jil EWAN

Gwengamp, d'an 3 a viz Here 1986

has

TARZH AR C'HOUMOUL DU

gant

Yann-Eozen Jarl

Kribenn wenn an tarzhioù teñval
A red war vor hon anken
Gant fru sklaset ar c'hounioù kent
A-strew e korwent gwall
Ur glac'har garv.

A Vab,
Bep beure ne glevimp, vel gwechall,
War hon treuzoù
Da vouezh tener o sourral :
"Kenavo emberr, Tad ! Kenavo, Mamm !
Ar c'henavo diwezhañ diehan a zasson,
E-kreiz hor c'halon, 'vel taolioù difronk
Ur glaz hirbad.

Ne zeui ken gant gouloù drant da dal
War-dro hon taol digenvez ;
Da gador, da viken, a vezo diberc'henn
Ha c'hwerv ar pred hep da vezañs.

Da daol-studi,
Warni un diwezhañ labour,
Ne vezo ken flouret
Gant da zorn meurgêzus.
Mirout a ray e derc'h derv
Koun ar striv dibaouez
A veiz, a breder, a venn
A blezhjout war steuenn da spered.

Bep lun, pa savin e bouezioù potin
D'an eurier kozh az kwelas o c'henel

E klevimp a-dreuz da dremenvan
Klemm izel
da vuhez o vervel.

Bep lun veure, da dremenvan doanius
A wado e c'houli e noz du hon anken.
War da vruched,
Da zorn dinerzh a glasko c'hoazh dirazomp
Ar vedalenn vurzhdus
A oa bet da wared e maeziou an emgann
Hag ar groazig arc'hant ken skañv
E-keñver ar groaz ken pounner
A oa da hini e dibenn
Da vuhez.

Bep nevez-hañv, 'vel kent,
E tigoro bleunioù bev,
Gant c'hoarzh al levenez
Er spernenn wenn-kann ;
Ha te, ne vezi ket amañ
Da ober marzh warnezhi,
'Vel ma rejout warlene
E leunder he c'hened.
Ha dre se,
Hol laouended er bed-mañ a vezo peurzister,
Rak diank e vezo a-vepred
Sked da lagad laouen.

Ez ti kinklet ganez ken dudius,
Daou vugel yaouank-flamm
Hag ur wreg a glask e pep amzer
Hag e pep lec'h da roudoù bividik,
A sklerijenn,
A garantez,
A vuhez ;
Ne van dezho nemet an eñvor
a zougont gant o doan
Lemm, diziwezh, don,

Stag ouzh o c'hroaz-gourboan
Ken garv ha ken bev.

Karet ac'h eus ez-vihan
Kannder gwerc'h an erc'h
Hag a red war bantenn serzh ar menez.
An testeni gounezet en oad flour
Da vout brezelour en uhel venez,
A stagas gwennder dinamm ouzh da ene,
A sternas ouzh da galon balc'hder,
Striv hir ha tenn
Ar venezidi galet,
A grafas kardarnded da ouenn ouzh da askre.

War hentoù brevus ar brezel
E sammes war da chouk karg da wazed skuizh.
E penn da gevrenn hemolc'h,
El lec'h ma oa ar brasañ riskl,
E felle dit bezañ hep fellel.
Ha goude an emgann ferv,
Da naon an enebour trec'het,
E kinniges da bred,
Ha leunder da c'hobed da derriñ e sec'hed,
Ha da gorf zoken da wareziñ e vuhez
Diouzh ur gounnar dall.

Nepell eus da c'hanedigezh,
E bered Vaucresson
Dindan un ivinenn c'hlas,
O c'hedal dasorc'h ar re varv,
E kousk da gorf kalonek.
Da ene avat a chom 'n hor c'hichen,
A-hed an deiz, a-hed an noz,
A-hed hor buhez,
Unanet e tan ur garantez
Enaouet da viken
E tommder ti Mamm Doue.

A Grist, Doue a Garantez,

Ganet e kled ur c'hev deñved,
Gant korf ha kalon eveldomp,
Didu ha dilezet en anken
E-kreiz da Grouadelezh,
Bev bepred e darempred an Tad hag ar Spered,
Marv evidomp dinamm ha yaouank,
Dirak glac'har da Vamm
E barr un aberzh doueel
Gant ur c'hourfoan c'harv,
Enklaouet
E viloni izelañ ur Groaz,
Bez truez ouzh hon enkreuz ;
Starta hon ene gwan ;
Glana hor c'halon gemmus ;
Hag a-barzh nemeur,
Hor bod a-gevret gant hor mab Alan,
E tarz da Sklerijenn,
Ha gourlenn-veur da Drugarez,
E yaouankiz laouen
Ar Vuhez didremen,
Divuzul
Ha buhezek-leun.

Ha tarz ar c'houmoul du
A yelo diamen,
Hep lezel e roudoù aner
War red an amzer.

Yann-Eozen Jari

TARZH AR VUHEZ

gant

Yann-Eozen Jari

**D'am mab, Alan, Ildud, Marie,
aet da anaon,
d'an 23 a viz C'hwevrer 1981**

En anv an Tad,

Santelaet ra vezo e Anv !

Aotrou, Aotrou Doue,
hor bugel,
hor bugel karet, hor bugel yaouañ,
luskellet a vihan 'n hon divrec'h,
dorn-ouzh-dorn ganimp war hent ar bed
hag ar vuhez ;
'n hor c'hichen e pep stourmad,
lorc'h ha balc'hded hon endon,
heol hon amzer levez, a zo bet diganimp
diframmet digernez.

Tad a zo en neñvoù,
aet eo davedout
'vit ar vuhez peurbad
ar mab az poa dilennet dimp.
Diskennet out ennañ ;
eñ a zo pignet Ennout.
'Veldomp, digor dezhañ
Da zivrec'h ha da galon :
n'omp-ni, traken, nemet kerent a wad,

un dadelezh ha mammelezh,
dislivet ha dihirbad,
war zouar an distervez.
Te hepken, Tad a garantez, Tad a druez,
Tad a frealz,
a zo dimp holl hon Tad ez-wir.
Hon Tad a zo en neñvoù, degemer mat da vogel,
hag en mir.

Tad,
piv a c'hellfe gwelloc'h egedout
dougen ganimp pouez pounner hor c'hañvoù ?
Piv a lavaro da anken, da enkreuz,
a-hed krizaberzh da Vab muiañ-karet
war hent skosellek Menez Kalvar,
er boan, en doan,
dismeg ha kunuj warnañ,
goapaet ha roget,
ha dilezet,
pa skoas outañ an Ankoù,
Eñ, da leuriad,
dinamm, divlam,
den ha Doue ?

Tad,
Piv na skrijo ket gant truez
o klevout,
dirak mor e reuz hag e reustl
ha tav da Vadelezh,
hervoud mousklennus hag hep spi
keinvan denel Jezuz,
da Vab karedik :
"Eli, Eli, lamma sabac'htani ?"
Hogen dreist freuz e spered,
an Dasprenour a venne evañ
betek ar goueled,
gant meurded e Garantez,
meurded e ginnigadur

a Zoue
dindan uvelder e zenelezh.

Tad,
piv a empenno biken ur c'hlaç'har
par d'az hini e-skoaz marv mezhus
Oan Doue, unan ganez a vepred,
diskennet eus e c'hloar
da c'houzañv war hon douar poanioù euzhus,
ha gounit drezo gopr ha dellid,
- daspren an dud ?

Aotroù Doue,
piv a welo hep krenañ daeroù dall da galon
o kouezhañ sioul
war hon douar leun a zroug ha leun a bec'hed
ha leun a nac'h ouzh Tan da Drugarez ?
Piv a c'hellfe gwelloc'h egedout,
pa fallia hor c'halon,
dougen ganimp pouez pounner hor c'hañvoù ?

Daoust d'an estrenvan
a wask war hor bruched,
a voug hor mouezh,
a vac'h hor spered,
a-dreuz hon daeroù c'hwerv,
e-kreiz hor c'heinvan,
e noz du hor reiz dall,
benniget ra vezo da Anv !

Tad hollanaoudek, hollgarantezk, hollc'halloudek,
- Ennout emañ ar Gwir, ar C'haer, ar Mat,
ar Peurvoud hag an Dreistpad,
hag ene kann hor bugel,
da vogel,
kemeret gantañ, goude tenn hag hir c'houzañv,
hent ar gêr en-dro,
hent ar Sklaerder Meur.

'Vit aberzh sioul e yaouankiz
ha kinnigadur uvel e vuhez,
ra vezo da annez leizh a ganoù,
a vleunioù hag a levez, ha da lez
leun a c'houloù drev,
- a flammoù bev,
hag a denerded,
frondet gant kuñvelezh
maezioù Breizh,
o tegej' da Anv
war an daoulin.

Tad,
Greour tir ha mor
ha neñv ha tan,
Mestr an dasorc'h,
Trec'hour d'ar marv,
ro d'hor mab,
hep termen,
goude harlu e vuhez den,
dreist splannder Feiz e spered,
- ar Vuhez,
- ar Vuhez Wir,
e tarzha ha trid ha red
da sklerijenn.

oooooooooooooooooooooooooooo

II

**En anv ar Mab,
deuet Rouantelezh ar Garantez !**

Alan, Ildud, Maria,
Te hor mab, te hor bugel,
tarzhet warnout ar c'hilac'har
a unvanjout a-greiz kaer
gant gouzañv Kristus, Doue ha Salver :
ar varn d'ar marv diwelc'hus,
skourjez frailh un droug didruez,
kurun spern an doan hag an enkreuz,
samm pounner kroaz ur c'hleñved fromus,
kigennoù muturniet o wadañ,
tachoù lemm ar seizi war wele kaezh ar gloaz,
hir dremen van hep den na netra
da zic'harvañ ar boan.
Ha te bepred hep tore
e lugern da feiz hep brall,
e tan skinus da garantez ;
e mor habask da c'hoanag bev,
bara kann an Neñv
o tougen da ene
e-harz Doue.

Kae 'ta, Alan,
dreist mor doueel al Levez, dindan avel flour ar peurbad
o kargañ gouel gwenn da ene,
war-du ar Sklerijenn a glod,
tal-ouzh-tal gant Doue.
Steredenn da feiz az stur ;
divaskell da garantez az toug,
kurunenn da spi az ked.
Chom a ri, koulskoude, war un dro,
buhezek 'n hor c'hreiz,
buhezek e noz du hon disrann.

Savet out, â vabig,
davet an Drugarez,
e douster heol ar beure
a skedas war da benn
e pred kriz da huanad diwezhañ,
hag hemañ en un taol,
glac'har meur ha meurlevenez.

Rak an dasprenour pevardachet,
- **Benniget e Anv Santel**, -
gwisket a sklaerder,
en deus galvet da anv hol!bad,
o tennañ da dal a-harp ouzh e vrennid :

"Alan, Ildud,
gwenvidik, te paour ha glan a galon,
setu deuet dit da viken,
nouennet a vannou,
gourlenn Rouantelezh taer an Nefivoù,
Rouantelezh ar Garantez.
Da bep eur, e pep lec'h,
klasket ec'h eus va bezañs
retoc'h dit eget an aer a anaes,
eget d'az lagad ar sklerijenn,
eget d'az korf ar bezout.
Setu dit bremañ e dudi an Deiz divarvel,
sell kufiv va daoulagad,
kinnig drant va daouarn toullet,
degemer birvidik va divrec'h digor
ha karantez va c'halon entanet.
Gwenvidik, te, Alan,
gant da galon dilorc'h :
dit e vezin diziwezh.
Da naon en do e walc'h
ha da sec'hed a vo torret
e nerzhveur ar santelezh,
rak ganen ec'h eus evet
kalir garv ar c'hwervoni hag ar boan.

Da gunuc'h a zo bet un hirvoud
o treuziñ va askre ;
da boan a zo bet ur gloaz
e pep gouli eus va c'horf ;
ganez e oan war da wele a c'houzañv,
va gwad o tiverañ gant da hini :
evidout em eus diwasket pep glac'har hep frealz
em c'hreiz hep kariad.

Alan, deus tre em Levenez
e goudor va Ene,
e kled glenveur ar Peoc'h.
Da studi a vezo Sklerijenn : me a zo Gwirionez ;
da labour a vezo Andon : me a zo Hol!c'halloud ;
da bedenn a vezo tan devus : me a zo Karantez."

Tra ma tride e gorreoù da spered,
gronnet gant hiboud ar mor,
ar gerioù a ganjout ken lies en iliz :
"Rabboni, va Mestr ha va Doue."

oooooooooooooooooooo

III

**En anv ar Spered Glan
bezet graet e youl war an douar
'vel en neñvoù**

Alan,

degemeret ec'h eus hep klemm
kemenn garv da zeizioù diwezhañ.
Ken alies ec'h eus
en em strinket dispont
dre zor ar c'hirri-nij,
da zivrec'h displeget 'vel eskell ur wennel,
o c'hedal dispak leun da harz-lamm,
- kaerder an douar o sevel prim davedout !
Hiziv, dor da dremenvan dibrennet,
da ene en deus lammet en divent,
douget gant divaskell da Feiz
betek ar Gened Veur : betek Doue

Dorn ur sant(1) a vennigas
da benn yaouank.

Deuet eo, hep mar, d'az arbenn war an hent
gant kan ar Follgoat war e ziweuz
'n ur frotañ lirzhin e zaouarn kalet.
An Tad Dominikan (2) a flouras a-vihan
da vlev rodellek,
en deus ivez, a-vremañ, linennet war da dal
Sin ar Groaz,
Sin ha ster ar Vuhez.

Ha te,
war da wele o tiwaskañ poanioù kriz
goude disamm bec'h da bec'hedoù
betek kannder' boull da galon
Digor-frank d'ar Gouloù-deiz,
ec'h eus kinniget laouen
d'an eoul sakr da zaouarn,

da ene d'ar Spered Glan,
ha da gorf d'an douar yen,
aluzon diwezhañ da aluzennoù.

Pa zeuas,

- youl Doue sevenet en e leunder, -
ar Buhezegour d'az kwelout,
- benniget ra vezo e Anv Santel, -
pennfeunteunioù an Dour bev
a zo sailhet ennout
gant gwenvidigezh an Neñvoù
ha lugern eürus da zaoulagad
o lintrañ dreist levez hor boud,
en deus gwelet Galloud Doue
e flammin an Heol a Vuhez.

Manet out dirak ar marv habask ha dizaon,
o peurginnig,
karget e boz da zivlav ledan
a gouer, a gadour,
da vuhez a-bezh ha frond izel da boan
evit silvidigezh da vreudeur
ha dilamidigezh pec'hed ar bed :
pec'hed da dad ha pec'hed da vamm,
pec'hed da vreur ha pec'hed da gerent,
pec'hed da geneiled ha da genlabourerion,
pec'hed da Vro.

Ha te,

direbec'h dirak pep den !
Da galon, annez ar Spered ;
da zremm, stivell a garantez
o tiverañ fresk ha boull ha sklaer
'vel glizhenn veure ;
da gomz, ster a furnez
'vel dour red war reier strink,
da zeizioù,
'vel steredennoù e sol glas an noz,

testoù splann a vadelezh.

Neuze ar Spered Glan,
- **karantez virvidik an Tad hag ar Mab** -
a gemeras da benn etre e zaouarn santel,
hag a c'hwezhas e anal war roc'h da huanad diwezhañ :

"Alan,

rezedet o deus e ruster ar beure
hadeier doueel da vadez ensterniet ez spered
hag egin glas galloudus da gredenn
daoust da gorwent, da skarnil, da yender,
amzer rust ar vuhez

en deus dispaket e-kreiz an deiz
bleunioù yac'h ha taer da spi,
Deuet int e tan da aberzh,
dindan skinoù Heol Doue,
da vezañ grañ a garantez
e pellgent da Beurbad
dirak maezioù lugernus an Neñvoù.

Alan,

dre vadez gwirion ar marv,
e dour pur ar Furnez,
perlez va donezonoù,
kendolpet ganez gant gred
e stêr voull da vuhez
a lintro war da benn
gant levenez an hirbad.
Kendalc'h e peoc'h va andor
hent da gerzh wardu ar Gwir,
kan da galon war-du ar Gened,
Striv da stourm evit ar Mad,
betek ma weli o sevel
a-dal dirazout
war vevn an noz
er sklaerder divarvel
Eneb ken ha ken arglasket,
dremm veurgarus da Zoue.

Emveuz ganen e kannder ar Sklerijenn ;
sun drezon laezh divent an Drugarez ;
anal ennon hep gourfenn
aer sijn ar Vuhez
e gopr da feiz,
da garantez
ha da spi."

oooooooooooooooooooo

IV

En anv an Dreinded

Arloz,
Ene hon ene,
Buhez hor buhez,
Tonkad hon tonkad,
Unan e kreuzeul ar Wirded,
Unan e neved ar Gened,
Unan e mor an Daded*
hep biskoazh a zeraou,
Unan e luc'h ar C'hlanded,
Unan e tan ar Garantez,
Unan e lusk ar Vuhez
hep biken a zigresk ;
Unan e divent ar Furnez,
Unan e kalon ar Santelezh,
Unan e dared ar C'halloudez,
hep biken a ziwezh.
Deus tre en da annez a roue,
davet an ene ac'h eus krouet
ha karet
ha dasprenet...
Davet hor mab, davet da vugel,
da vevañ da viken ennañ
e douster uvel un deiz dinamm
hep morenn,
hep poan, hep glac'har,
er Sklerijenn,
el Levenez,
er Garantez,
Peoc'h pok da ziweuz
war e dal laquen,

oooooooooooooooooooo

V

En anv Mamm ar Garantez

Ave Maria, gratia plena, Mamm eus an Neñvoù,
Gouloù an Heol veure,
eneb denel an Doue dihwel,
eien ar Vuhez dreistamzerel,
skedusoc'h eget ar skedusañ steredenn,
glanoc'h eget ar glanañ lilienn,
kreñvoc'h eget kreñvañ emlusk
tolzennoù ar meurvor,
o tougen war da benn
kurunenn aour an Daspren,
ni az ped eus don hon anken,
stard ez tivrec'h splann hor bugel,
'vel gwechall da Vabig Jezuz
a-hed deizioù da wennved.

Ave Maria, Dominus tecum,
gwerelaouen a Nazared
e penn uhelañ ha donañ
da greizon
a zo bev kevannez an Unan-Dri,
er sioulded,
en digenvez :
eno ar Sklerijenn hep skeud,
ar Garantez digollus,
ha flamm ar Goanag divrall !
A, Te, benniget dreist an holl,
ne vern ar melre kriz
a rog hon askre,
kan d'hor bugel da wenvidigezh
ken n'e gavimp a-nevez
en tu all da vor ar vuhez.
Kan dezhañ kreñv 'vel tonn an divent
levenez don ar Beure Peurbad.

**Ave Maria, benedictus fructus
ventris tui, Jesus...**

L'iorzh waredet,
merc'hig uvel a Nazared,
ganet dinamm, divlam bepred,
a-holl-viskoazh tonket
gant an Hini a zo Santel e Anv
da vezañ Mamm ar Garantez
engehented ennout dre ar Spered Glan,
bez laouen,
bez laouen, Gwerc'hez Vari :
setu ganet ganez ar Sklerijenn
da henañ ar re azezet
er goañv teñval ha yen
gant o c'halon galet ;
setu ganet ganez Ger Doue a emginnigo
da derrañ ilboued wennved
an dud keizh hag izel.
Bez kadarn, Mamm Grist,
a-dreuz doan hag enkreuz,
ganet ganez Oan Doue ar Gouzañvour,
Dasprenour ar re gollet,
a zigoro dezho, holl gement,
tiernelezh drant un nevez-hañv diziwezh.
Te, Mamm, az kalvomp :
teñvalder hor c'halon vlin ne dalv !
Lusk hor bugel war da varlenn,
'vel ma luskes da grouadur
e lugern glein
peoc'h ar serr-noz
dindan gleien c'hlan da bedenn.

Mamm Jezuz,
ouzh e heul e barr e vrud,
war hentoù Galilea,
gwelet ac'h eus un niver a dud
o tremen,
hag ur vamm e kañv

o tifronkañ.
Kerkent, da vamm a gemenn :
"Maouez, chom hep leñvañ !"
Hag Eñ dasorc'hiñ paotr intañvez Naïm,
hag henn reiñ bev d'e vamm.
E pedenndi Kafarnaom, e glevet ac'h eus,
en e sav,
gant e dal kelc'hiet a vannaù, oc'h embann :
"An Dasorc'h hag ar Vuhez, Me an hini eo.
A gred ennon, end-eeun pa vefe marv,
a vevo."

Stivell a Levenez,
Feunteun a Garantez, Froud a C'halloudez,
digor da zorn santel
d'hor bugel
da ginnig dezhañ, peurvev,
teneridigezh da galon aour ;
en ambroug d'ar Pask Hirbad,
ouzh treid toullet an Doue diannez,
argaset gant e hentez,
desavet ha maget ganez,
a zeiz da zeiz
'is toenn da di,
'lec'h ma tihunes e spered sklaer
da voullder ar Gouloù doueel
ha d'an aluzon dreist vuzul.

Mamm Grist,
stok outañ en deizioù trist
gant Feiz diskoazell ur goañv noazh,
setu warnout teñvalder ar strafuilh denel,
amzer an amc'houlou,
pred tiern ar bed, koulz ar c'hleze a dreuzo da galon.
A-benn daou zevezh ar Groug,
d'az mab gren ha tener,
ar Groaz da C'hreour an Hollved,
hag e c'heilfe bezañ ?

Daoust d'un doan pounner 'vel ar mor
ha da freuzioù lemm ar stourmoù diabarzh,
e touges diglemm
da wiridigezh a vamm.

A, frealzidigezh ar re boaniet,

Mamm a druez,
taol ur sell gwardedus war hor bugel
hag en diwall tost d'az Mab
e galon guñv hag uvel.

Mamm,
tristidigezh dilavar ha tremenvan divonn da vugel,
kengouzañvet ganit derc'hent e verzherinti,
piv o displego ?
Ho taou hoc'h eus kenlavaret
dre al levenez kent mouget gant an ankenioù-mañ,
hep sond na glann :
"Tad, nann va menn, da hini hepken."
Hag ennout da-unan, Gwerc'hez, brevet ha malet :
"Mab Doue, a-sur, hogen va mabig ivez,
va bugel,
Roue ar re baour, ar re bur, ar re eeun,
koskor ar Rouantelezh da zont."

Mamm Grist, a-dreuz d'az taeroù taeroù kriz,
bez ivez Mamm garet hor bugel,
e kledour da Vab, trec'hour da zroug an douar
- degemer anezhañ,
- e penn e boan.

Mamm druezus,
sell divskoaz da vugel digoret,
e gorf troc'het,
kigennoù e izili diframmet a lavnennoù
gant ur skourjez gouez,
e dal toullet gant drein begok ar spern,

e gein krommet dindan pistig iskis
ur yud a ziwask.
Gwel : "Setu an Den !"
Setu da vugel, Mamm,
ha daoust d'e veurdez divent e youc'hont
ar mallozh leun o genou :
"Ra vezo krouget !"
Eñ an Dinamm, an Douster, an Uvelder !
Eñ ar Furnez, Eñ ar Vadelezh, Eñ ar Garantez !
War straed Krapenn Kalvar,
sammet gant holl bec'hedoù ar bed e taoubleg
dindan bec'h e groaz euzhus,
hag e zremm a glask, hirañ ma c'hell gwelout,
liv gwenn da hirlenn.
A-greiz-holl, disoublañ a ra.
Ur frapad emac'h ho taou
tal-ouzh-tal,
hep ger,
unanet a-gor
e kevrin meur aberzh Oan Doue.
Ur from skrijus ha digar a vroud hoc'h eneoù,
freuz ha reuz an holl vammoù
a gren war da gerc'henn,
ha da galon a vamm a venn rannañ.
Harp da gazel, Yann hepken a vir ouzhit
da gouezhañ en fallaenn war ribl an nivarzh.
Dalc'h soñj, Mamm, eus pedenn c'hwek hor bugel
o klask er bann heol
flourad da zaoulagad
karget a garantez.
Bez koun eus galv birvidik
ar gerioù diwezhañ
war e ziweuz dinerzh :
Jezuz, Gwerc'hez Vari !

A Vamm,
skourret o deus ouzh ar groug,
gwadek ha noazh,

da vugel karet ;
ha te, krog e kelf ar Groaz,
damc'holoet gant tarzhadur klouar
ar goulioù doueel,
a glev en-dro dit :
"Ra en em denno e-unan !"
Mamm, c'hwi ho taou,
e kendaspren mantrus
holl dud ar bed,
ho taeroù berv o kouezhañ war an douar,
a asped unanet :
"Tad, dilam outo o zorfed :
ne ouzont ket pezh a reont."
Daoulagad kloz o c'halon fall ha dall
ne welent ket,
dindan an den,
an Doue karour
ha dieuber
a oa dirazo.
Kent ar c'himiad diwezhañ,
dallet gant reñver a c'hlaç'har
hag a boan,
daoulagad an Den-Doue a baras warnout ;
da gonfortañ da galon e c'housourras dit :
"Da Vab, Mamm, Yann an hini eo."
Ha da Yann, an diskibl a gare ar muiañ :
"Setu da Vamm."
Hag o sellout ouzh an Neñv,
e vouskanas dindan eñvor ar bedenn hirvoudus :
"Va Doue, perak am dilezes-te ?" (3)
Padal, drezañ, gantañ, ennañ,
an Doue-Tri a ginnige
ezorc'h e garantez foll, diargas ha digas
da skubañ daeroù estrenvan an den dianket
ha digeriñ da gement saotret
Dor ar Vuhez.
Ha neuze, dirazout, Mamm, da derriñ ildied ar Merzher,
diwadet holl,

e voe kinniget
suroni hakr hag heug ar bestl,
goude c'hwervoni an dismantr.
Dirak poan dreistdenel da Vugel,
ar gunjerion war dec'h a gren
en noz gwall.

Mamm a druez, setu o tont warnoc'h,
skiltrus ha spontus, an disrann diwezhañ :
"Peurc'hraet eo pep tra."
Neoazh, ur ger a feiz, ur c'han a galon,
ur galv a spi,
a darzh,
nerzhus, peoc'hus, skedus :

"Tad, etre da zaouarn e c'horrean va spered..."
Ha gant un uhel a gri,
a-zioc'h d'az tal beuzet en ankenioù,
penn doueel Jezuz a soubl divuhez,
e kevrin meur ar Garantez.
Roc'h mantrus ar mammoù oc'h arvestiñ dic'hallus
ouzh tremenvan o bugel,
ne savo biken ken kreñv,
gant kement torr-kalon
a voe biskoazh.

Fromet, ar Grouadelezh a-bezh a zoug kañvoù,
hag ar c'hantener dirak niver ar burzhudoù
a youc'h : "Mab Doue, a-dra-sur, 'oa hemañ."
Flamm doueel kendevel krenn
e brev ar Gouzañvour,
bez sklerijenn don ha tomm ha skañv
hor mabig !
Mamm an Dasprenour, ro dezhañ
ar peoc'h a lamm
eus da vrennid a vamm,
Te, Mamm an daeroù,
Mamm Doue garwasket,

Mamm Doue kroazstaget,
Mamm flastret gant enkreuz an islonk.

Mamm,
kent serr-nouz Gwener ar Groug,
Yann hag an teir Vari, en o foull,
a lid ganez arc'houest ar Mestr,
o c'hedal diskenn korf Hor Salver.
Setu bremañ, douget gant daou vignon,
a-led war da varlenn, peuraberzh hon Doue.
E pleg da vrec'h e talc'hes penn ar C'hrist,
penn truezek da Vabig,
stok ouzh da vruched ;
da galon tener treuzet gant kleze lemm
ur glac'har mut;
ha da ene pur
kollet e peñse duañ da Garantez,
e lides evidomp kalañ ofern 'is Kroaz ar Gristeniezh.

Buan, dirak an noz o tont,
gwalc'h ha balzam ar Vadalen,
ha bugel da vuhez lienet ha beziet
e kev ar voger-vaen...
Ha te, Mamm, da unan, sioul,
gant ur pok hir war zor ar bez,
sebeliet bev e marv kevrinus
Brenin ar gouzañvoù.

Mamm, goude poanioù kriz,
douaret hon eus ivez hor mab Alan ;
deus ha gwalc'h ha balzam e ene mac'het
gant krogad garv ar boan.
Kemer anezhañ war da zivrec'h dispar
hag en c'hinnig 'vel un ostiv glan
da gannder Doue
e splannder an Drugarez.

Mamm,

bremañ ha da viken,
bez laouen ;
e beure seder Sul gardis an Trede Deiz,
dasorc'het eo da Vab karet
war grug ar glac'har.
Ul levezeg lugernus e sol da zaoulagad
a lintr a-dreuz daeraouenn guzhet da galon.
Dranted ar stered a goroll en Neñvoù
war dourioù lor ar Baradoz
e noz boull ha glas
ar Peoc'h dudius
deuet en-dro
da ene pep den.
Rak hent tan ar Garantez,
Gwirionez skedus ar Ger,
Aberzh, Dasorc'h ha Buhez,
Da Vab Jezuz an hini eo.

Mamm,
e meurded da wenvidigezh,
aotren d'hor mab,
douget gantañ kroaz kalet ur boan c'hourc'harv
kanañ klod Anv Doue,
gwelout e zremm a sklerijenn
hag hirarvestiñ da Eneb meurgaret,
ha dous ha tener.
E leunded da laouenidigezh,
diskuizh e spered,
dizoan e galon,
heolia e ene ;
Te, eien pur ar Vuhez Doueel,
Te, andon sklaer al Levezeg
treamzerel.

Peogwir hon eus, war ho roudoù,
douget un netra, ur sin hepken,
siwazh, pounner,
eus samm mantrus ho klac'har doueel,
Tad, Mab, Spered Glan, ho pet truez ouzh hor mab,

Alan e galon dizoñvus ;
 Treinded Sakr, en abeg d'e haelled
 ha d'e fealded,
 ni hoc'h asped,
 grit ennañ hoc'h annez,
 C'hwi ennañ, eñ ennoc'h ;
 roit dezhañ perzh 'n ho Levenez tiernel.

Mamm eus an Neñvoù,
 e mor da Garantez
 e lakaomp hor goanag ;
 etre da zaouarn santel e lakaomp hor bugel.
 Mamm, gant Jezuz, e garet ac'h eus ;
 gant Jezuz, en em ginniget ac'h eus da-unan
 evitañ ;
 e boan a zo bet da boan.
 Feunteun leun a zouster
 e skeud da uvelder,
 ra darzho da viken davitañ
 Dour bev ar Peoc'h.

Sant Alan ha Sant Ildud ha Sent Breizh,
 pedit evitañ e yezh hor bro ;
 kanit gantañ war an delenn
 Hosannah diziwezh hon Aotroù
 ha santelezh hon Arloz.

Alan, gant leunder da levenez,
 daoulagad hor c'halon a welo
 da ene kaeroc'h eget an Deiz.
 Ha te,
 e skinelezh ar Wirionez,
 e briatelezh ar Garantez,
 e gwenvidigezh ar C'halloudezh,
 a welo Doue,
 hon Aotroù Doue !

Amen ! Amen !

Amen !

Yann-Eozen Jarl

oooooooooooooooooooo

TARZH AR SUL

gant

Yann-Eozen Jarl

Sul ez eus anezhi : e-lec'h gorreoù ur bedenn vev
kinniget da Zoue o zadoù,
dezho blogornoù gall an tele porno
ha dienez ur reiz treut ha magn ha kamm
o vrizh-c'hoarhzin e-mesk bouzelloù brein ur c'hagn.

Du va ene, teñval va hent,
dall va daoulagad, beunek va c'halon,
ansklaer va menn klouar
ha kroez avel va douar tenn.

Aotroù Doue, hor beuz ez Sklerijenn !

Sul ez eus anezhi : e-lec'h kan heson ar Salmoù,
glabouez gallek e beg o genoù
hag o kantren dre an tevennoù,
e don o c'halon dic'hlan, lanv
an erez ouzh berzhoù-mat o breudeur.

Yen va ene, skornet va hent,
sklerennet va sell, skarnilet va buhez,
frimet va reiz, kalet va c'halon,
anoued em menn baour,
ha revet froud va amzervezh.

Aotroù Krist, hon dev e gred da Garantez.

Sul ez eus anezhi : e-lec'h darempred' an iliz santel,
int a zañso diempred, 'vel margodennoù,
e moged ar butun hag an orged.

Divalc'h va ene, digenvez va hent,
dinerzh va dremm, difonn va buhez,
luziet va reiz, diloc'h va c'halon,
strobet va menn gaezh,
ha mouget bividigezh va gwered.

Spered Glan, hon dasorc'h e flamm da C'halloud.

Ha te, an **Doue-Tri**,
e tan da Drugarez,
dilam ouzhimp hon dleoù !
Ankounac'haet yezh ha Bro ha Kredenn.
Sul ez eus anezhi.
Deiz an Aotroù eo,
deiz goulo, yen ha du,
Deiz hep Doue, deiz hep Feiz,
dervezh hep Karantez,
a-grenn hep bri ouzh ar Vuhez.

Daoust ha Sul ez eus anezhi ?

Yann-Eozen Jarl

TARZH TERVAL ANNEZ DOUE

gant Yann-Eozen Jarl

Ilizoù Breizh, dindan ho nevioù
e kane dec'h tud an Arvor,
tud kalet ha kreñv o c'halon aour.
Hiziv e klever etre ho mogerioù
kantigoù louet ar C'hallaoued.
Ha marv eo tud an Arvor ?
Glac'har du ennoc'h, Tad eus an Neñvoù !
Aotroù, ho pezet truez !
Aotroù, ho pezet truez !

Ilizoù Breizh, dindan ho nevioù
e pede dec'h tud an Argoad,
tud hael ha taer o sell hegarat.
Hiziv e klever etre ho mogerioù
pedennoù divlaz ar Gall.
Ha lazhet int, tud an Argoad ?
Anken don ennoc'h, Jezuz, Roue hor maezioù.
Krist, bezit truez !
Krist, bezit truez !

Ilizoù Breizh, dindan ho nevioù
e prederie dec'h tud ho Pro,
tud kadarn, tud kristen, tud bev.
Hiziv e klever etre ho mogerioù
krign-bev herrus ur yezh estren.
Pelec'h emaint, tud uhel ar Vro ?
Enkrez kriz ennoc'h, Spered Santel.
Aotroù, ho pezet truez !
Aotroù, ho pezet truez !

Ilizoù Breizh, kalon hor c'halon,
ho tourioù lemm a lamm d'an Neñv

- hor yezh da uhelbal d'hon ene, -
ho karidoù a gan e froud an avel-gorbell,
- ar brezhoneg en emgann feuls hor Feiz, -
Taget yezh ar galon, taget kalon ar Feiz,
hogen o-daou difaezh.
Dalc'hit start, ilizoù keizh ;
anez, warc'hoazh, e welor amzer gardis
diwezhañ stourm kristen diwezhañ Breizh.

Ouzh ilizoù douar ar Sent,
Aotroù Doue, bezit truez ;
o diwallit diouzh an dilez ;
o gwalc'hit diouzh ar vezh.
Aotroù Doue, bezit truez,
bezit truez ouzh hoc'h annez.

Yann-Eozen Jarl

VA C'HOAR AR GOZHNI

gant **Seur Erwan Meudeg**

Troidigezh gant **Y.E. Jarl**

Noz vat, va c'hoar ar Gozhni,
te ha na feller mui gervel dre'z anv.
Da welout a raen o tont davedon
gant un trivliad dianzav a c'hwervoni.
N'az c'hoantaen ket.
Da gemerout a raen evit ur skraperez.
Hogen displeal 'oan ez keñver-te
am gwalc'h : keuz bev am eus.

Abaoc ma ne reomp nemet unan,
deuet out evidon c'hwek ha breurel.
Va lakaat a rez da gerzhout dre valiennoù a sklerijenn
ha da vont war-raok ganez ouzh da heul,
war-du frankizennoù diharz.
Ar reizhded diabarzh
m'em eus redet en aner war he lerc'h,
setu m'en diazez da zorn diogel
'vel ur renerezh amaes.
Ennon e rezan unanded,
keneilez he c'hammedoù voulouz,
sioul 'vel red an amzer.

Gant evezhiadurioù ar garantez
ez ares ennon,
hepdon
kornadoù ouzhin dianav.
Troc'hañ, difraostañ, devañ a rez,
ha kreñvoc'h eget an doan,
e lakaez ennon ur frealzidigezh,
ur boemerezh poellus ha pounner,
'vel ur penn-ed leun-barr.
Ret eo ma varvo pep tra a zle tremen

'vit ma vevo ar pezh a zle padout.

Va Doue, da bediñ a ran ez-avel :
gant na vougo biken youc'h va dienezioù
kan ar vuhez war sav.
A, hep mar, kaer e oa
kensonadeg an hañvoù nevez
gant e luskell a heizez laouen o koroll
hag e strollad a vouezhioù yaouank
o kanañ a-dal d'an heol,
an Divatelezh,
an Hegredigezh,
Lorc'h kehelus ar vuhez e bleuñv.

Ne vegadin morse anezho.
Ne zroukkomzer ket eus an eürusted ;
hag ennon e kan,
ha kanañ a ray betek an diskar,
'vel un eienenn wenn d'ar beure,
ar ganaouenn-se a huñvre
ma vourre enni, goursavet, va ene bugel.

Hogen bez' e oa e goueled va levenez
'vel ur galv damglev,
ur gest diziwezh,
ur vezañs dihwel,
didrouz ha dalc'hus,
hag a-wechoù damguzh,
ur vegenn c'hlan a enkrez pegus.
Ne ouien ket pezh e oa.
Bremañ avat en gouezan,
Kudenn luziet va buhez e oa
a azgoulenn an neudenn eeun,
an notenn wir, hag ar gerzenn reizh
a glasken a-dastorn
ha na gaven ket.

Da neb ha n'eus ket fellet dezhañ arsaviñ,

end-eeun m'en deus kerzhet stroñs-distroñs,
hag a ra dit min vat, va c'hoar ar Gozhni,
hag a vouskan ur c'han-plaen heson.
N'ac'h eus nemet ur gerzenn : an hini ' oa diank ;
n'ac'h eus nemet un notenn : an hini ' oa war dec'h ;
disheñvel da bep hini
hogen dreist-holl divalc'h
'vel gwirionded dudius Doue.
Hag a-daol-trumm e tarz
ne ouzer penaos :
ur barrleunder digoumoul,
peurc'hraedigezh kevrinus
a imbourc'h hag a zouj pep den,
a zouj hag a imbourc'h pep hini.
Ret henn lavarout,
henn lavarout adarre,
henn lavarout atav :
ma reomp eured ganez,
te hor skoazell da lakaat Doue
da gemerout ennomp e stumm gwir.
A, nag a amzer a zo ret, â va c'hoar !
Ennomp e stabilaez Anezhañ,
e tarevez Anezhañ,
- breüs dougadur ! -
e tirkuzhez Anezhañ,
- Ginnivelezh espar ! -
Rak pep ene en deus e bellgent dibar.
Pa vez an holl vouezhioù tavet,
hon-unan-penn,
ha ni o c'harmiñ :
"Va Doue, ha Te eo a oa aze ?
Me, n'am boa ket
anavezet Ac'hanout !"

Seur Erwan MADEG

oooooooooooooooooooo

Notenn. Bet eo Seur Erwan Madeg Mamm Veur ar
Seurezed Gwenn. Ganet e Tremaouezan e 1905. Marvet
e leandi "Kêr'n Itron", e Plistin (miz Gouere 1981).
Beziet eo bet eno e bered ar Seurezed Gwenn.

oooooooooooooooooooo

A-zivout ar seblantoù

gant

Yann MIKAEL

Plijet on bet o lenn pennad Ivon Morvan diwar-benn ar seblantoù. Me 'm eus bet tro, e Sant-Wazeg, da gomz gant ur vaouez hag he deus donezon ar seblantoù (hag ur bern anezho he deus gwelet). An darn-vuiañ a denn da gañvoù o vont da c'hoarvezout dizale. Unan avat, hag a zo sanket don em penn an eñvor anezhañ, a denn d'ar purgator. Setu penaos eo en em gavet an traoù. Un nozvezh e voe Anna Rannvili dihunet trumm eus he c'houk. Sklerijennet e oa ar gambr gant ur gouloù ha na zeue a neb lec'h, hag unan eus hec'h amezegezed, marvet un nebeut bloavezhioù a-gent, a oa e-harz he gwele. Bez' e oa evel m'he doa hec'h anavezet a-raok he marv gant he dilhad war ar pémdez en-dro dezhi. Ha setu Maï Kilvran, -hec'h anv e oa - da ziskleriañ dezhi edo c'hoazh er purgator. Hogen mar befe lavaret un oferenn eviti, emezi, e vefe glaanaet da vat hec'h ene hag ez afe d'ar baradoz. Hag e steuzias ar welidigezh. Strafulhet gant an darvoud-se e voe diaes da Anna Rannvili adkavout ar c'houk, met komprenet fraezh he doa ar pezh a c'hortozed diganti, ha kerkent hag antronoz ez eas da welout an Aotrou Person, a-benn goulenn un oferenn evit diskuizh ene Maï Kilvran, an abretañ ar gwellañ. Ur pemzektez bennak goude e voe lavaret an oferenn-se, hag Anna Rannvili a gemeras perzh enni, a-gevret gant un toullad mat a vaouezed all o doa anavezet mat-tre o amezegez. C'hwec'h deiz bennak war-lerc'h e c'hoarvezas heñveldra e kambr Anna. Ar wech-mañ avat edo Maï Kilvran en he dilhad-sul, he c'haer a davanjer brodet en-dro dezhi, ha war he fenn he c'hoef kaerañ gant stroñs ha distroñs. Ur

mouse'hoarzh seder a hañvale bezañ war he muzelloù. Bez' e lavaras da Anna e oa deuet en-dro d'he zrugarekaat, rak edo bremañ er baradoz ; hag e steuzias ar welidigezh.

E-touez an holl seblantoù ma komzas Anna Rannvili diwar o fenn en deiz-se ez eo hennezh a zo chomet fraezh ar muiañ em spered, hag a chomo bepred. Kiriek eo da se moarvat an tabut taer a-walc'h am boa bet a-ziagent gant unan eus frered ar barrez a rae war-dro ar c'hatekiz, e-kerzh un emvod-prientiñ end-eeun. Hegaset gant an holl amzer a golled o plediñ gant ar sapre "parcours catéchétiques" (ne dalvez ket ar boan treiñ ar gerioù-mañ e brezhoneg), diaes ober ganto da zedennañ ar vugale, setu me o tiskleriañ, taer un tammig an tamm ac'hanon : "Setu tost da bevar bloaz ma'm eus kroget da ober war-dro ar c'hatekiz ; biskoazh avat n'em eus klevet komz en ho podadegoù-prientiñ nag en ho tornlevrioù eus baradoz, purgator hag ifern." Ar respont a voe ur c'hoarzh ouzh va fri digant ar frer. Evitañ ne oa an traoù kozh-se nemet amoedajoù ijinet gant ar gloer er c'hantvedoù tremenet evit spontañ an dud dizesk, bepred dindan levezon ar brizh-kredennoù, a-benn ober dezho heuliañ sentus ar gwir relijion. Arabat e oa, hervezañ, klask komz eus kement-mañ ouzh ar vugale a hiziv ; poan gollet e vefe, rak gant o spered digor-frank war ar bed arnevez, ne vefent mui evit krediñ hevelep sorc'hennoù. Evidon n'eo an arguzenn-se nemet un digarez toull. Traoù fetis eo baradoz, purgator hag ifern, ha dedennet eo ar vugale gant traoù fetis, ha n'eo ket gant kealioù kleuz kourmoulennek, evel maz eo tezennoù ar vuhezgezh laik a zo deuet da vezañ hini kalz a gloer diwar vremañ. Meur a wech a-hend-all ma pledan gantañ. Ar vugale a zegemer ken aes keal an ifern hag ar purgator ha ma tegemeront hini an toull-bac'h evit an dorfetourion pe ar felladannerion. Se a zo ar gwirvoud. N'eus ket pelloc'h zo eget dimerc'her diwezhañ em eus kontet an danevellig emañ o paouez

dezrevell diwar-benn ar seblant bet gwelet gant Anna Rannvili. A-daol-trumm, setu ar peoc'h o ren e-touez ar vugale, ha pep hini o selaou aketus, hep ma vije bet ret din sevel va mouezh evit ober dezho paouez gant o fistilh hegasus. Gant divskouarnoù digor-frank, evit chom hep koll an disterañ komz o tont diganin, e voen selaouet ; ha goude-se goulennoù o tifloupañ diganto evit kaout diskleriadurioù war an destenn. Gant piv emañ ar gwir, gant piv emañ ar gaou neuze ?

Nevez 'zo em eus lennet ul levr skrivet gant ur vaouez e darempred gant an Anaon er purdan. Un aostrianez eo, ha Maria Simma hec'h anv. Talbenn al levr : "An eneoù er purgator o deus divizet ganin". Abaoe bloavezhioù e vez gweladennet ar vaouez-mañ gant eneoù ar Purgator, en hevelep doare maz eo c'hoarvezet gant Anna Rannvili ; hogen gant kantadoù a Anaon. Hogos bewech e vez goulennet pedennoù, oferennoù, kinnigidigezhioù d'ober. A-wechoù zoken e vez goulennet ouzh tiegezhioù an dud varv daskoriñ arc'hant pe traoù laeret gant an hini tremenet e-pad e vuhez douarel, laeroñsioù dianav d'e diegezh eveljust, met a ziskouez bezañ gwir a-benn ar fin. Displeget ez eus el levr-se kalz traoù diwar-benn an eneoù er purgator ar poanioù a c'houzañvont hag o fadelezh, pezh a zisamm o foanioù hervez o fec'hedoù, penaos e welont ar re vev, penaos e hiraezhont d'ar baradoz h.a., h.a.

Fromet a-walc'h e voen, evel dres, o lenn al levr-se ha ne voen ket evit mirout a soñjal em c'herent marv ha tud all eus va ziegezh. Un dek devezh bennak goude bezañ lennet al levr-mañ, setu me oc'h ober un huñvre e-kreiz va c'houk. Bodet e oamp e ti va c'hoar intañvez, gant an tiegezh a-bezh. Marvet trumm e oa gwaz va c'hoar, tri bloaz hanter kent, hag he mab, va niz, hag a oa va filhor, bloaz hanter goude, en ur gwallzarvoud. Ha setu ma oa va breur-kaer ha va filhor en hon touez o tiskleriañ edont o-daou er purgator ; hag

oa eus ar vourc'h m'edo Gwilherm o chom betek an Henblas pemp kilometrad bennak d'ober, pe ouzhpenn, ha tremen a rae an hent dreist d'ar menez. En desped da se ez ae Gwilherm da weladenniñ Suzanna div pe deir gwech bep sizhun, ne vern pe seurt amzer a rae.

Un nozvezh e tlee bezañ ur servij er chapel* e-kreiz ar sizhun, hag hogos bep taol ma veze un dra bennak enni da noz un devezh labour evel-se, e oamp kustum, ni, mibion ha mevelion ar goueriaded, d'en em gavout a-gevret ur c'hardeur bennak a-raok ar bedenn, evit drailhañ kaozioù ha klevout ar c'heleier. Pismiget a-walc'h e oa ar boaz-se gant hini pe hini, hogen evit meur a abeg e c'helle unan sevel a-du gantañ : n'eo ket alies hor beze tro d'en em welout an eil egile, hag evit gwir ne c'hoarveze nemet e seurt degouezhioù, rak o chom e oamp e-barzh atantou a oa skignet a-dreuz ar maezioù, pell an eil diouzh egile. Ma, evel m'em eus lavaret, ur servij a oa da vezañ d'ar merc'her-se da noz, hag e oa en em dolpet un toullad ac'hanomp, paotred yaouank, e-tal ar chapel 'ta, un tammig a-raok an amzer. Un nozvezh skorn e oa, nemet sklaer a-walc'h, ha goude m'hor boe divizet ur pennadig, piv a welemp o tont etrezek ennomp eus tu ar menez, nemet Gwilherm ar Bugul. Pa erruas en hor bete, e taoljomp holl evezh e seblante bezañ hogozik strafuilhet, ha goulenn a ris outañ ha c'hoarvezet e oa un dra bennak gant an deñved. Respont a reas din, ha setu ar c'homzoù a zeuas gantañ, ger evit ger :

- N'eus ket, tamm ebet, Edouarzh. N'ouzoc'h ket petra avat : me 'm eus gwelet un dra souezhus ha spontus o tont dreist d'ar c'hrec'h-se. C'hwil 'oar n'on ket ur paotr aonik tamm ebet, hogen p'edon o tont d'an traoñ war an tu-se ez on en em gavet en un taol en deñvalijenn e-giz en ur forn : n'oan ket evit gwelout va dorn. N'on ket bet spontet evit keloù, ha mont a ris war-raok dre an deñvalijenn, ken e teuis d'ar sklerijenn a-benn ar fin ; neuze e chomis a-sav da sellout war va lerc'h, ha neuze e welis ur goulenn zu, hir hag izel, nemet

kompez al lein anezhi, e-giz pa vije bet lein ur voger pe hini ur c'hleuz a vije bet nevez diskoultret. O kenderc'hel da sellout outi, e welis, en un taol, ur bagad a dud, evel un ambrougdeg, en tu-hont d'ar goulenn. Ne oa din da welout avat nemet o fennoù hag o divskoazioù, ha daoust ma tiskouezent bezañ tost em c'hichen, n'oan ket evit anavezout hini ebet anezho. Gwelout a raen an dud o luskañ war-raok, war un dro gant ar goulenn, ha trumm e verzis e oa pevar dez dirak houmañ, hag int o tougen un arched war ur c'heler, hag e oa un den a-dreñv ar c'heler war gein ur marc'h, hag hemañ a anavezis diouzhtu : Yann Abroperzh, eus ar Voti, an hini e oa, pignet war gein e varc'h du. Chom a ris a-sav da sellout ken na voe aet ar goulenn hag an dud dreist d'ar stêr, a-hed an hent a gas d'ar vourc'h, ma kollis ar gwel anezho."

Souezhus-meurbet e oa an istor-se evidomp holl eveljust, met dreist-holl, na petra, evit an hini a gonte anezhañ e-unan ; hag a-hend-all e kredemp kement ger a oa ennañ dre ma oa Gwilherm ar Bugul un den leal a bep hent. Ouzh e welout strafuilhet kement e lavaris dezhañ, diwar skañv, e oa e welidigezh ur ragarouez eus e eured da zont, ha dont a rejomp tre er chapel, ha Gwilherm a-gevret ganeomp. Hogen n'em eus ket kontet ar pep souezhusañ. A-benn ur sizhun war-lerc'h an noz verc'her-se e oa kroget d'ober erc'h forzhik a-walc'h, hogen evit derc'hel d'e c'her ez eas Gwilherm ar Bugul dreist d'ar menez, o skeiñ war-du an Henblas, d'ober gweladenn da Suzanna. Ne chomas ket pell gant e vuiañ-karet, rak soñja zalc'he eus an dro en devoa d'ober d'un hevelep nozvezh. Dres goude dezhañ kuitaat an Henblas e krogas d'ober erc'h adarre en un doare spontus, ma kavas ar bugul gwell treiñ diwar e hent ha repuiñ en un davarn, da c'hortoz eno e vije fin d'ar gaouad. Ne gavas en ostaleri-se nemet ur banne (forzh penaos, ne gemere biskoazh muioc'h eget unan, rak un den reizh ha moder e oa Gwilherm). O welout avat e talc'he d'ober erc'h ken

gwazh atav e reas e soñj kemer evelato hent ar gêr : anavezout a rae ar menez mat-kenañ, ha nouspet gwech, emezañ, e oa aet drezañ gant un amzer gwashoc'h c'hoazh. Hogen biskoazh ne ziraezas Gwilherm e di en bev. Kavet e voe antronoz, marv e-barzh an erc'h. Neuze o devoe ar baotred soñj eus an istor kontet gant o c'heneil dirak kael ar chapel, ha souezhiñ a raemp holl o soñjal en dra-se. A-benn un nebeut devezhioù en em gavis, me hag un nebeut eus ar baotred a oa ganin o selaou istor Gwilherm, en e obidoù end-eeun ; hag a-boan e c'hellemp tennañ hon anal pa weljomp ne oa nikun eno war gein e varc'h, nemet Yann Abroperzh, eus ar Voti, e-unan !

Suzanna, eus an Henblas, a rannas he c'halon raktal goude-se, ha mervel a reas gant an droug-skevent.

Peseurt diskleriadur a roi d'un dra evel istor Gwilherm ar Bugul, n'ouzon tamm ebet, hogen ken gwir ez eo an istor-mañ ha m'emaon-me azezet war ar gador-mañ ; ha bez' ez eus un toullad tud bev c'hoazh hiziv hag o deus soñj anezhañ koulz ha me va-unan, eme va contr Edouarzh.

Daniel OWEN

05050505050505050505050505

* Gweinidog metodistat e oa ar skrivagner-mañ, hag anv a zo gantañ eus ur chapel metodistat war ar maez, enebet ouzh iliz ar vourc'h, dalc'het gant an Iliz Stadel saoz. Deol-kenañ e oa Kembreiz en naontekvet kantved, evel ar Vrezhoned en hevelep prantad.

&&*&*&*&*&*&*&*&*&*&*&*&*&*&*

A-DREUZ-LENN

Even Erlannig.- La résistance bretonne à Napoléon Bonaparte. 1799-1815.- Paris, Editions Albtros I Diffusion Université-Culture, 1986.- In-8°, 320p., sk.

Tri bloavezh evit tommañ ar speredoù pe, mar plij ganeoc'h, "gwalc'hiñ an empennoù", setu an amzer a soñje da baotred ar pempvet Republik Gall e vije bet rekis dezho evit gellout lidañ en un doare dereat, ha war an ton bras, an Dispac'h Meur Gall eus 1789. Ha dre m'en deus aon ar gouarnamantgall a hiziv rak bezañ tremenet d'ur gouarnamant "réac" ("kilstourmer"), emañ o vont da deurel warni, ha da greskiñ c'hoazh ar pompadoù a oa prientet gant ar "sokialourion" a-benn kanañ meuleudi d'ar "Gourdadoù Meur". It da gompren ! Emañ paotred ar Stad c'hall o taeriñ leun a zellid hag o varn en anv ar vertuz gwalldaolioù ar "sponterion" a hiziv ; petra eo avat "spontig" ar sponterion-se e-tal Spont bras Sponterion an Dispac'h Meur gall, graet ganto eus an dibennerez hag ar c'hobar-beuziñ binvioù - efedus, ret eo aotren se dezho, - a c'houarnamant, hag int oc'h oberiañ a-berzh ur galloud direizwiriek, skrapet ha ma bet gant ur vodadeg ha na oa ket bet dilennet na kefridiet evit kemm renad ar vro.

Dre m'emañ ar "yoc'hstlenn", skingomz ha skinwel dreist-holl, e dalc'h ar Stad bepred, e vezo atav, hiziv evel dec'h, skignet ha brudet ar gevier o deus breinet, a-hed daou gantved, speredoù ar geodedourion c'hall. Diskleriet e vezo ur wirionez bennak, mesket e vo ar gwir hag an diwir, hemañ ar stumm gwidreüsañ evit gaouiadiñ ha distresañ an Istor. Setu perak, forzh penaos, ne c'heller kaout fiziañs ebet e kelennadur kefridiel an Istor e Bro-C'hall, dre vras.

N'eo ket prest an holl da selaou ha da zegemer koñchennoù ar re a vez o fardañ an Istor Gall. Dija zoken, e-touez izili ar Skolbennoù, e kresk mennozioù

a frankiz-komz. Nevez 'zo ez eus bet embannet meur a levr, en o zouez un dezenn-doktorelezh diwar-benn brezel-Vañde hag ar chouanterezh, a oa diskleriet dec'h c'hoazh evel ur seurt forbannerezh, traken, hep ma vije lezet d'ar ouizieion a blede gant an danvez-se an disterañ frankiz-imbourc'hañ ha -soñjal: arabat e oa dreist-holl dilufrañ ha lousañ skeudenn sakr an Dispac'h Meur gall.

E-kichen an oberennoù niverus embannet e-kerzh ar mizioù diwezhañ diwar-benn emgannoù Vañde, a-zivout Jord Kadoudal hag ar chouanterezh, e vezo ret lakaat, hag en ul lec'h a zibab, labour diwezhañ Even Erlannig. Diaes e vefe kavout un arbennigour barrekoc'h eget hemañ war ar prantad-se eus hon istor. Savet ez eus bet gantañ meur a bennad-skrid er c'helc'hgelaouennoù breizhek arbennikaet. Kinniget ez eus bet gantañ ivez un dezenn-doktorelezh diwar-benn ar penngadour Louis de Grisolles. Netra souezhus enta m'emañ diazezet an oberenn-mañ war dielloù ha testennoù eus an dibab. A-hend-all, resisaet eo ar mammannoù en notennoù e traoñ ar pajennoù. Evel-se ez eo aes d'ar skrivagner reiñ kabestr d'e bluenn da zezrevell an darvoudoù en ur stumm plijus ha dudius evit al lenner.

E gwirionez, ar stourm breizhek a-enep da vac'home-rezh ha da waskerezh froudennek an Dispac'herion c'hall ha Bonaparte a voe kreñv, hag urzhiet en e wellañ er Morbihan. Souezhus eo gwelout pegen mat e veze frammet pep tra e sell d'un emgann a glote gant an endro, spered an dud ha beli an enebour: pennoù-azrannad, kadlevioù-parrez, mirlec'hioù-armoù ha -bitailh, klañvdiou, gopr-stourmerion, tachennoù-dilestrañ a-hed an aod evit an dud hag an armoù, daveadur herrek ha diogel ar c'hen-skriverezh. Start e veze pep tra; ha kompren a reer penaos e c'hellas ar chouanterezh padout keit all a vloavezhioù, e-tal strolladoù soudarded enebour niverusoc'h-niverusañ.

Lenn a reer an danevell-mañ ken aes hag ur romant, dreist-holl er pennadoù o tisplegañ, dre ar munud, an iriennoù,

an "taol-da-gas-da-benn-hep-mank", ma voe rouestlet ennañ Pichegru ha Moreau: ur bagad a varc'hegerion a zlee tagañ gwarded Napoleon ha skrapañ ar C'hoñsul, un taol ha na oa ket ken stultennus ha ma c'hellfe unan soñjal, un taol a voe c'hwitet gantañ avat war wall dievezhiegezh unan ha treitouriezh egile. N'oa ket ar Fouché, rener ar gerreizh, na petra, figus-meurbet war zoareoù-ober e bolis. Dedennus-tre ha fromus eo ar pennad ma konter ennañ prosez Jord Kadoudal hag e genseurted. Sur eo: ne droas ket an traoù er prosez-se en enor Bonaparte, en enor an damallidi, ne lavaran ket!

En ur pennad diwezhañ ez eo taolennet chouanterezh ar bloavezh 1815, urzhiet gant De Sol, diouzhtu goude ma voe deuet en-dro Napoleon eus enez Elb. Niverus e voe ar Chouanted neuze, ha derc'hel a rejont e Breizh ouzhpenn 25.000 soudard gall a reas diouer da armeoù Napoleon e Waterloo. A-drugarez dezho e voe faezhet ar "ronfl".

Setu evelkent un disoc'h a-bouez evit ar soudarded chouant: miret o doa ouzh an impalaouriezh c'hall napoleonat a astenn adarre he c'hraban war Europa a-bezh. Hogen un disoc'h all a oa bet tizher ganto endeo, hag a oa ken pouezus all, ma n'eo ket pouezusoc'h, e deroù an impalaeriezh napoleonat bepred. Skoilhet da vat gant gwask an armeoù katolik e Vande hag e Breizh en doa ranket rener ar Stad c'hall sinañ ur feur-emglev gant an Iliz: "kefredklev" 1801, a aotree evelkent un tamm frankiz relijiel bennak d'an Iliz, hag a oa pal kentañ an emsavadeg. Diskouez a rae an eil trec'hadenn ne oa ket Breizhiz prest da zegemer n'eus forrzh peseurt gwaskerezh o tont eus Pariz.

Ur c'hendastum sklaer eo oberenn Even Erlannig, o tiskleriañ stourm ar Chouanted, e baliou, e urzhiadur, an darvoudoù hag an disoc'hoù anezhañ. Ul levr a chom rekiz da bep studi onest diwar-benn ar stourm breizhek-se, ul levr m'emañ e lec'h e pep levraoueg sevenadurel breizhat. Berzh-mat d'an oberenn-se!

J.C.

.....

Jean-Jacques PRADO.- La Bretagne avant Nominœ.-
Mayenne, Imprimerie de la Manutention, 1985.- In-
8°, 300p. Priz : 170 lur.

Setu ul levr a raio trouz e-touez an dud a labour pe o deus labouret war istor Breizh. Evit lavarout ar wirionez e-giz m'emañ, - degouezhout a ra al levr-mañ evel ur c'hi en ur c'hoari-kilhoù. Bountet eo gantañ d'an traoñ, dizamant ha rust, meur a dezenn bet kelennet evel kement-all a dezennoù dreistarvar, gant an aotrounez kelennerion eus ar Skolioù-Meur. Ret eo lavarout : n'eo ket dousik eo e vez displantet o fegement d'an aotrounez kelennerion-mañ.

Kemeromp skouerioù. N'eo ket deuet ar Gelted eus Kreiz-Europa (pe eus pelloc'h) da Arvorig ; ar Gelted avat eo a zo aet etrezek ar Reter, Kreiz-Europa, Italia, Azia-Vihanañ, Ejipt ha me 'oar-me, dre vor betek ar broioù diwezhañ-mañ a-hend-all. Rak setu nerzh pouezusañ ar Gelted : ar mor. Biskoazh, kennebeut, ne voe trec'het ar Wenedourion gant ar Romaned ; kement-se n'eo nemet ur goñchenn ijinet gant Julius Kaezar. N'edo ket o c'hêrbenn kennebeut all e-lec'h emañ Gwened hiziv, met kentoc'h war-dro Gwennrann.

Ar Vrezhoned a hiziv a zo diskennidi ur bobl a zo bet chomet bepred en Arvorig ; an divroadur o tont eus tramor n'eus ket bet anezhañ (ne oa ket ezhomm anezhañ, ma komprenner mat soñj an aozer, rak ur "pont" pleustret a-viskoazh ez eo bet Mor Breizh etre ledenez an Arvorig ha ledeneziou all Kornog Enez Vreizh !). Penaos, avat, diskleriañ e vefe an hevelep anv diwar vremañ da vBreizh-Vihan ha da Enez-Vreizh ? Rak ar ger "Breizh" n'eo ket bet staget ouzh ar ger "Enez" a-raok ar Vvet kantved. Ur gudenn all, hini ar yezh :

maz eo bet komzet ar brezhoneg a-viskoazh en Arvorig, hep troc'h ebet, penaos diskleriañ ez eo aet ar galianeg da get e Bro-C'hall hag e Breizh-Uhel ? Perak ez eo ar gwenedeg disheñvel diouzh ar c'hKLT, ma n'eo ket diwar levezon ur yezh all disheñvel diouzh ar brezhoneg ?

Setu tezennoù all difennet gant an aozer. Ne voe biskoazh "Domnonea" ebet a-hed aod hanternoz Arvorig (bet bro an "Osismi") ; biskoazh ne voe ar rouaned frank mestr war Arvorig ; se a zo ur vojenn ijinet evit harpañ youl vac'hom Merowingiz ha Karolingiz da stagañ Breizh ouzh o rouantelezh.

Hag adarre : ne voe ket trec'het ha lazhet ar Roue Morvan e Minieg-Morvan, e-kichen Langoned, met war-dro Nostang, nepell diouzh Gwened. Ne zeuas ar galloud gant Nevenoe nemet e 837, ha ne voe lakaet da roue nemet e 848, goude marv ar roue Laouenan, ankounac'haet gant ar Vrezhoned. H.a. H.a.

Amañ e roomp un damskeud eus oberenn J.J. Prado. D'an arbennigourion barn talvoudegezh ul labour a seurt-se, dedennus-tre evit ar studierion.

Riskloù a zo koulskoude. Da skouer, emañ an aozer o teurel an diskred war labourioù pe studiadennoù a zo bet kaset da benn, koulskoude, gant kalz a aked hag a evezhiegezh, ha dre se d'ober arvarourion eus ar re yaouank ha na vint mui evit krediñ e c'hellfed tizhout ur wirionez asur ha diogel bennak dre an Istor. Ar pezh a zo lakaet da wir hiziv a vezo diskleriet diwir warc'hoazh. Ivez : re asur eo ton ar skrivagner o tisplegañ e dezennoù. D'hor soñj ez eo Léon Fleuriot furoc'h o tezevell penaos e voe atav liammoù hag eskemmoù etre ar Gelted a bep tu da Vor Breizh, da nebeutañadalek ar c'hentañ kantved, ha moarvat a-raok, hogen oc'h ouzhpennañ ivez e voe evelato, en tu-hont da se, un divroadeg vras bennak, blienet gant menech'h, a labouras goude-se da gristenañ Arvorig, war-dro ar pempvet hag ar c'hwec'hvet kantved.

N'eus forzh ! Setu ul labour talvoudus o tiskouez da vihanañ e voe ar "Vrezhoned" ("Osismi", "Veneti"

h.a.) mestr en o bro e-pad meur a gantved, gant ur sevenadur dezho o-unan ; hag e voe mennet o amezeion alies da aloubiñ houmañ ha d'he skrapañ diganto, evit laerezh he finvidigezhioù ha sujañ hec'h annezidi.

Bouetaet eo ar pajennoù-mañ gant ur spered broadel didro ha karantez Vreizh.

J.C.

Gant hor c'henlabourer hon eus degemeret un eil buruteladur eus an oberenn-mañ, hag a voulomp amañ da heul.

Ul levr-stourm ez eo hemañ, savet evit reizhañ meur a dezenn degemeret ha kelennet evel gwirionezioù diarvarus abaoe kantvedoù, ha dalc'het dezho gant kelennerion ar skolioù-meur, en o c'hentelioù, o frezegennoù pe o skridoù.

Burutellañ a ra ar skrivagner da gentañ talvoudegezh ar mammennoù (ar pezh a zo reizhpoell), hag e-touez ar re goshañ "Eñvorennoù diwar-benn brezel Galia", savet gant Julius Kaezar. Enebiñ a ra Prado ouzh ar re o deus degemeret an danevell savet gant ar glevgadour roman brudet da wirionez istorel. Klask a ra tabut dreist-holl ouzh ar gelennerion Skol-veur dre maz eus anezho "al Lezenn hag ar Brofeted" e bed ar ouiziegezh. Un tamm hardishegezh a ranker kaout evit henn ober : gouzout a oar Prado ez eus dirazañ tud a-bouez, diwallet gant un hudverzh, koulz lavaret. War-lerc'h skridoù Kaezar e vurutell 'ta, ouzhpenn, buhezioù ar Sent, dre ma ne vank ket enno ar mojennoù, gouez dezhañ.

Ne c'hellomp ket dezrannañ dre ar munud al levr fetis-mañ. Pledañ a raimp hepken gant un tezennoù bennak, dibabet e-touez ar re dagusañ. Kemeromp, da skouer, ar morgad ma voe trec'het ennañ Gwenediz. Tabut ez eus atav diwar-benn al lec'h : e pleg-mor ar Mor-bihan pe er Meurvor, dirak ledenez ar Wizh. Diskleriañ a ra Prado avat : an danevell kevaotet gant Kaezar a zo, koulz lavaret, ur vojenn. It da welout avat,

Diaes eo dislavarout ar skrivagner en degouezh-mañ, dre ma vank deomp, dres, an dielloù.

Ur gudenn all. Teurel a ra ar skrivagner adarre an diskred war dreuztiriadeg ar Vrezhoned eus ribloù hanternoz Mor Breizh da reibloù an Arvorig ; da nebeutañ, ne voe ket houmañ ken pouezus ha maz eo bet displeget meur a wech. Padal ez eo sklaer-kenañ tezenn Leon Fleuriot, ar gouizieg hag ar yezhoniour anavezet mat, ha muioc'h arlivet eo an dezenn-se eget hini Prado. Hervez Leon Fleuriot 'ta, e krogas an ermaeziadeg-se war-dro an eilvet pe an trede kantved ; met a-viskoazh ez eus bet darempredoù etre ar Gelted eus pep ribl ar Mor brezhon ; nemet kreñvoc'h e teuas an ermaeziadeg da vezañ war-dro ar pempvet ha c'hwec'hvet kantved. Un daeladenn all a c'heller ober da dezenn Prado : perak he deus dreistpadet ar yezh keltiek nemeti o treistvefañ war ar c'hevandir, en Arvorig, nemet e-lec'h m'o deus dilestret ha bevet ar Vrezhoned ? Ha n'eo ket stummoù galianek ar yezh a zo aspadet met ar stummoù brezhonek end-eeun, an hevelep re hag e kembraeg hag e kerneveg. Da grediñ eo enta e voe pouezus a-walc'h an ermaeziadeg evit kemm ar vuhez er vro nevez.

E dibenn al levr e tamall Prado da Nevenoe bezañ klasket ober eus Breizh ur galloud kevandirel, pa oa dazont Breizh, ent-anat, war ar mor ; rak war ar mor eo o doa al levierion gent, Konomor en o zouez, diazezet nerzh ar vro. Troet en deus Nevenoe avat e selloù war-du an douar. Kement-se avat a zo ankounac'haat striv pennek Nevenoe da ober unanidigezh ar vro ha da ziwall hec'h amzer-da-zont e-skoaz da vegozh hec'h enebourion, Franked ha Normaned. Ne gav ket deomp ez eo talvoudus barn ar skrivagner en afer-se.

Moarvat ez eus ur broadelour gwirion eus Prado, ha kement-se a lakaio meur a hini da duiñ dezhañ. Hogen gwerediñ a raio a-enep dezhañ e argadusted ha n'eus torr ebet dezhi a-hed an oberenn. Dre se e chom al lenner war zisfiz ouzh an tezennoù a c'hellfe bezañ gwir pe zamwir. Gwell e vije bet d'ar skrivagner, ma

felle dezhañ bezañ selaouet ha tremenet d'un den sirius, kemer un dro-bluenn skiantel ha yen, o reiñ da soñjal e oa anezhañ ur gouizieg doujus d'an ergorelezh. J.J. Prado, ret eo krediñ, n'en deus ket an habaskted a zo rekiz d'ur istorour a-zoare. Da nebeutañ en dije gellet pellaat evel-se, marteze, ar respontoù taer ha krenn a vo graet, moarvat, d'e dezennoù gant meur a "vandarin" gwall feuket.

Un dellid bras a chom evelkent d'an oberenn-mañ. Difraostañ a ra un dachenn a c'hello, spi hon eus, bezañ turiet donoc'h gant an imbourc'herion a bledo en amzerda-zont gant istor hor bro.

J.C.

.....

Moulet gant "Keneiled Imbourc'h" Ar rener: Y. Ollivier
CPAPP : 50 015